



KANTIK

Itron Varia an Drenek.

Var don : *Eun Doue a zeu d'ho kervel.*

DISKAN :

*Itron Varia an Drenek,
Eur zell var ho pugale ;
Dre ho peden holl-c'halloudek,
Hon diouallit noz ha de.*

Beteg chapel hor Mamm garet,
Chapel Mari Mamm Doue,
En deiz-ma omp holl diredet,
Gant fianz ha karante.

'Tre daouarn ar Verc'hez santel
Ema tenzoriou an Ee ;
Var he zervicherien fidel
Bemde 'skuill grassou neve.

Puroc'h eo 'vit ar sklerijen,
Guennoc'h evit al lili ;
Mar kassomp dezhi hor peden,
Ni a vo pur eveldhi.

D'hon eneoù an drouk-spered
Heb ehan a ra brezel ;
Mes 'vit miret ne vemp trec'het,
Mari a ro deomp skoazel.

Deuz pep drouk ha deuz pep dan-
Eo ato prest d'hon difen ; [jer
Hi eo esperanz ar pec'her,
Ha yec'hed ar glanvourien. (1)

Laket mestrez d'an traou krouet,
Koulz d'ar zec'hor ha d'arglao,
Hi c'hell digass, pa ve pedet,
Glaocier, pe amzer vrao. (2)

Nag a vech prosessionou
D'he chapel zo diredet !
Nag a vech var hon douarou
He bennoz ho deuz tennet !

Guechall-goz, chapel an Drenek
A oa dija brudet braz.
Ar Revolution diaoulek
Tra heuzuz ! he diskaras.

(1) Itron Varia an Drenek ve pedet dreist holl enep an derzen.

(2) Dont a reer ama ive-da c'houlen amzer vad evit an douarou.

En hon amzer, ti ar Verç'hez,
Zo bet græt a neve flamm ; (1)
Hag abaoe, deomp e tiskouez
Muioc'h-mui ez eo hor Mamm.

P'e guir aman daouarn Mari
A skuill kement a c'hressou,
Ni vo aketuz d'he fedi
Ha da zont d'he fardonioù. (2)

Ni vo d'an Itron Varia
Guir zeryicherien bepred,
Ha, pa iafomp euz ar bed-ma,
En ifern ne gouefomp ket.

Var hor fin, Mamm garantezuz,
Kemerit hon enëou,
D'ho lakât 'tre daouarn Jezuz,
Ma zaint ganthan d'an Envou.

(1) Er bla 1874.

(2) Ar pardon braz a ve græt d'ar zul varlerc'h Gouel Maria
hanter-Eost.

Imprimatur :

Kemper, 2 Gouere 1907.

EM. FLEITER,
Vikel vraz.



Kemper, moulet e ti de Kerangal.